

Pobl Vreizh

4^e

Meurzh 1981 - niv. 131



Kerzhadeg dre ruioù kêr Vrest d'an 21 a vis C'hwevrer, ewid lâred nann ! d'an distruj a vez gwraet d'ar plassoù-labour e Brest hag e Breizh (sell. p. 4).

TRAOU NEWEZ KOST' AR MENEZ

Digarez awalc'h a vez da hirvoudiñ kost' ar Menez, amañ gis-mañ, gant an dud arru bihan ba kreis ar vro hag ar brezhoneg o vont war-dreñv dousta-dig! Ma ranker klemm ha 'n em chalañ alies gwech 'ta, beb ar mare evelkent e teu un newenti vad da sederraad ahanomp. Hag er wech-mañ e teu joaiusted ha plijadur da heul, zo kaerroc'h...

Ur « gasetenn » newez a zo ganet, ur gasetenn dre gasetenn diwar skwer heni **ar Vro Plin**, kaset en-dro gant **R. Richard**. Homañ he deus diskouezet an hent, ha digoret aneñ abaoe tri bloaz so, o vont hebiou d'ur skoilh a harze ar vrezhonegerien : ar yezh skrivet (koulz hag ar yezh lennegel). Un toulladig kasetennoù zo bet lañset er c'his-se : unan deus tu Treger, un all etre Gourin, ar Gemene hag ar Faoued (**Kasetenn an tri c'hanton**), ha re all c'hoazh...

Kasetenn ar Menez eo hanwet hon heni, newez deut e-maes e mis Genveur 1981 hag ambissionet da zont en-dro beb mis. Goleiñ a ra daou ganton, da gomañs, re ar C'hastell-Newez hag an Uhelgoad, med en em astenn a ray heb dale ba heni Karaes, me gred, peusheñvel e vrezhoneg deus an daou all evel ousoc'h. Degeter mad eo ar gasetenn bar vro : labourad a rae dija heniennoù da zastum ha da embann kontadennoù ha kanaouennoù bar Vro Dardoup (Plonewez hag ar C'hastell-Newez) ; en taol-mañ o deus laket ar maerioù ha pennoù bras ar vro deus o zu. Assantiñ a raont kasi toud da sikour ha da « vennigañ » ar Gasetenn (nemet-hag asened e vefent evel maer Poulouen, a zo « eneb », ha penn-dabenn...).

Setu, kement ha reiñ deoc'h ur skwer, danvez an tamm kentañ :

TU an HUELGOAD :

Y. ar Gak, deus ar Fouilhez, a gen-nig an abadenn.

Job Kahut, deus ar Fouilhez iwe, a gont « Paotr Job ».

Ar Rous ha Dilasser a gan un ton dañs-tro pe gavotenn.

F. 'n Andrew, maer Skrignag, a gomz deus e barros ;

Re gozh Plouie hag o « C'hlub », An

Itron Kemener deus Berrien, ha d'echuiñ, Yann Tomas deus Bolaség, a gan « Son ar Mezwier ».

TU ar C'HASTELL NEWEZ :

Yann Moulin a zispleg danvez ar Vro Dardoup.

An Itron Citharel a gan « Son ar Bloawezh Mad ».

G. Caro, deus Plonevez, a gont « Tro ar Barres ».

Per Coquil, deus Koloreg, a gan ur ganaouenn,

An Itron Floc'h, deus Sant-Waseg, a gont ur rimodell.

Tud deus ar C'hastell-Newez a gomz diwar-benn ar SICAMOB eno.

Paotred « Skloumoù Glas » Spezed a gont o « zroioù » o c'hoari bolotenn ba Brest, ha d'achuiñ, sonerezh « Hilare Carhaisienne ».

Danvez fonnus, ha brezhoneg mad hag aes da gompren, disklipet evel a faot, gant tud a-vod o klask delc'her o renk dirag ar mikro ! Daou rummad tud a blijo an traou-se dehe, 'nes kontañ ar re ema o mouezh e-barzh ar vouest... : ar re yaouank, stank awalc'h, a boagn da zeskiñ ar yezh (ur c'hant bennag etre skolioù Kreis-Breizh), hag ar re gozh a gar ar brezhoneg hag a gavo plijadur o selaou tud a anavezont ha traou klewet gwechall. C'hoant o deus ar re gentañ da zeskiñ, hag amzer o deus ar re all da gelenn. Ase ema ar jeu. Hã n'eus ket med an dud etre an daou oad na gavint ket amzer na plijadur gant traou sort-se moarvad. Er mod-se ema kont !

Epar ar sort kasetenn-se eta, da'm soñj. N'eus ket med un dra da rebech dehi : daoust ma vez gwerzhet peb kasetenn d'ar pris a goust kasimant, ker e vo kavet gant kalz tud, abalamour ar re-se eo just awalc'h ar re yaouank a vez berr an arc'hant gante, hag ar re gozh a gustum lakad o zam-mig « glaou » ba traou all ewid an dra-se... Ya, petra ri, gis-se ema ar jeu !

Chañs vad da **Gasetenn ar Menez** koulskoude, hag eürusted da badoud.

F. Favereau

KEMENNADENN

gant komite-stourm studierion war ar c'heltieg Skol-Veur Roazon II

Studierion ha kelennerion eus kevrenn ar c'heltieg Skol-Veur Breizh Uhel (Roazoh) zo bet ganto ur vodadeg veur d'ar yaou 29 a vis Genveur.

P'emeur gant bloawezh 3 « Skrid-diaze Sewenadurel Breizh », e vez gwelet n'ez eus ket c'hoazh Aotregezh Vrezhoneg ebed, ewiti da vezañ goulennet hag adgoulennet abaoe 10 vloaz.

Ne fell ket d'ar gouarnamant eta e ve stummet da vad ar gelennerion vrezhoneg. Skol vrezhoneg a vez graet gant kelennerien eo o micher kelenn traoù all : petra a ve da lared diwarbenn ur skol vatematik a ve graet gant ur c'helenner war ar saosneg ?

Pessort fiziañs kaoud er gouarnamant pa oa daou ziplom ha n'eus ket ken anezo er bloaz-mañ : diw vestroniezh ?

Gwall vihanig eo an arc'hant ahendall, ken n'heller ket ober skol da vad : ne wel ket ar studierion liw eus an arc'hant a vez red kaoud da lakaad al labourva war ar yezhoù da vont en-dro.

Enkreset kàer eo ar studierion o soñjal e vefed o vont da dennañ ar brezhoneg er-maes eus Skol-Veur Breizh Uhel.

Setu e c'houlennont groñs :

— e ve adsavet an diplomoù a zo 'paoues bezañ lamet,

— e ve anavezet an aotregezh vrezhoneg a zo bet goulennet gant Kusul ar Skol-Veur, med nac'het gant ar gouarnamant : paneveti ne vo ket tu da grouiñ postoù war ar brezhoneg.

Savet ez eus bet ur c'homite-stourm diwar ar vodadeg veur, ha mennet mad eo d'ober bec'h beteg penn.

RADIO - U.D.B.
Tel. (16.98) 80.18.47

AL LIAMM

ar gelaouenn nemeti o roiñ, 6 gwech ar bloaz barzhonegoù, kontadennoù, pennadoù a beb sort ha keleier 80 pajenn e peb niverenn - Renner : Ronan Huon
komanant : 50 L - Studierion : 35 L
Teñzor-merour : P. Le Bihan - 16, rue des Fours-à-Chaux
ST.SERVAN 35400 ST.MALO - CCP 5349-06 PARIS

AR FALZ

kelaouenn drimisieg an Emsav diazezet gant Yann Sohier, bodet ennañ skolærierion ha kelennerion Vreizh a-du gant ur skol vreizheg ha laik gwirion

Lennit Ar Falz ! Komanant d'Ar Falz !

(40L ewid 4 niv.)

AR FALZ, Str. Kan-Ar-Gwez - 29245 PLOURIN-MONTRouLES
KRP 430-20 H ROAZON